

Lettre d'information n°147 - Juin 2026

Exposition « Lettres et correspondance » Du mardi 2 au samedi 13 juin



Les enseignants des écoles Diwan, La Madeleine et Saint-Léonard de Guingamp, ainsi que les adolescents de l'hôpital de jour de Pabu ont travaillé cette année avec les bibliothécaires sur le thème des lettres et de la correspondance.

Les jeunes ont souhaité exposer leurs productions artistiques et les correspondances qu'ils ont entretenues.

Cette exposition est le fruit de leur travail.

Café-lecture samedi 6 juin de 10h à 12h



Vous aimez lire et découvrir de nouveaux auteurs ?

Vous aimez aussi parler de vos lectures, donner votre avis, raconter, critiquer, râler, sourire et même rire ?

Venez retrouver Fanny et Morgane pour un temps d'échange convivial !

Entrée libre - pour adultes et adolescents - gratuit

Racontines Samedi 13 juin à 10h30




Racontines pour les 0-3 ans

Histoires, comptines, chansons et jeux de doigts sont au programme afin d'initier les plus jeunes au plaisir des histoires.

Entrée libre - gratuit

Atelier numérique « Introduction à l'Intelligence Artificielle » Jeudi 18 juin de 10h à 12h



Ambiance conviviale et échanges autour du numérique avec Catherine Théaud, conseillère numérique.

Public : Ados et adultes - gratuit

Renseignements et inscriptions 06 58 40 38 41 ou 02 96 44 06 60

Exposition de l'école d'arts plastiques du samedi 20 juin au samedi 4 juillet



Présentation des travaux annuels des élèves de l'école d'arts plastiques de la ville de Guingamp.

Entrée libre – gratuit.

Café-parlotte Jeudi 25 juin à 10h30

Un café parlotte pour faire découvrir la médiathèque et ses services aux aînés.



Organisé par le CCAS et la résidence de Kersalic, ce rendez-vous régulier a pour but de recueillir les attentes des personnes âgées sur le bien vieillir à Guingamp.

Chaque café parlotte est organisé dans un lieu différent de la ville : bar, café, maison de quartier... Cette fois-ci, le café parlotte aura lieu à la médiathèque.

Les bibliothécaires feront découvrir ou redécouvrir les lieux et les services aux participants avant un moment d'échange autour d'un thé, d'un café... et de quelques petites douceurs.

Entrée libre – gratuit.

« Furoshiki à la bibli » Prêts mystères à la médiathèque tout l'été



Et si vous empruntiez un livre, un DVD ou un CD sans vous fier à sa couverture, à son titre ou à son auteur ? Ou si vous partagiez vos coups de cœur avec les autres lecteurs de la médiathèque ?

Empruntez et/ou proposez un prêt mystère pour l'été, emballé dans son furoshiki.

Heure du conte : un mercredi sur deux à 15h A partir de 4 ans - gratuit



© Martine Bourne

Mercredi 10 juin

Conte : «Le petit cochon têtu » Jean-Louis Le Craver

Un conte randonnée qui joue sur les enchaînements burlesques. Une course folle et une bonne femme au sacré tempérament.

Mercredi 24 juin

« Contes et berceuses dans ta langue » avec le Centre social Ti Menoz

Venez écouter une histoire en bilingue, ou une chanson dans sa langue maternelle.



Médiathèque de Guingamp
1, Place du Champ-au-Roy
22205 GUINGAMP Cedex
02 96 44 06 60
mediatheque@ville-guingamp.com
<http://mediatheque.ville-guingamp.fr>

Lizher-kelaouiñ niv.147 - miz Even 2026

Diskouezadeg « Lizheroù ha kenskrivañ » Eus ar Meurzh 2 d'ar Sadorn 13 a viz Even



Ar gelennerien er skol Diwan, e skolioù ar Vadalen ha Sant Leonard, hag ar grennarded en ospital deiz e Pabu o deus labourret ar bloaz-mañ gant al levraouegerien war tem al lizheroù hag ar c'henskrivañ.

Faotet zo d'ar re yaouank diskouez disoc'h o labour arzel hag al lizheroù o deus kaset ha resevet.

Frouezh o labour eo an diskouezadeg-mañ.

Kafe-lenn Sadorn 6 a viz Even eus 10e da 12e



Plijout a ra deoc'h lenn hag ober anaoudegezh gant skrivagnerien nevez ?

Kaozeal diwar-benn ho lennadennoù a blij deoc'h ivez, reiñ ho soñj, kontañ, burutellañ, grozmolat, mousc'hoarzhin ha c'hoarzhin memes ?

Deuit da gontañ kaoz gant Fanny ha Morgane ur pennadig !

Mont e-barzh frank - evit an dud deuet hag ar grennarded - digoust

Kontarimastell Sadorn 13 a viz Even da 10e30




Kontarimastell evit ar vugale 0-3 bloaz

Istoriou, rimadelloù, kanaouennoù ha c'hoarioù bizied a vo graet evit lakaat ar re yaouankañ d'ober anaoudegezh gant an istorioù hag ar blijadur a vez da-heul.

Mont e-barzh frank - digoust.

Atelier niverel « Ober anaoudegezh gant an Naouegezh Artifisiel » Yaou 18 a viz Even eus 10e da 12e



Ur mare dudius ma vo komzet diwar-benn an niverel gant Catherine Théaud, kuzulierez niverel.

Evit ar grennarded hag an dud deuet - digoust

Titouroù hag enskrivañ : 06 58 40 38 41 pe 02 96 44 06 60

Diskouezadeg gant ar skol arzoù-neuziañ eus ar Sadorn 20 a viz Even d'ar Sadorn 4 a viz Gouere



Diskouezet e vo al labourioù graet e-kerzh ar bloaz gant ar skolidi er skol arzoù-neuziañ e Gwengamp.

Mont e-barzh frank – digoust.

Kafe-flapañ Yaou 25 a viz Even da 10e30



Un abadenn kafe-flapañ evit ober anaoudegezh gant ar vediaoueg hag ar servijoù d'an dud kozh.

An emgav reoliek-mañ a vez aozet gant KOSG hag annez Kersalig abalamour da anavezout gwelloc'h ar pezh o dez ezhomm an dud war an oad evit kozhañ mat e Gwengamp.

Pep emgav kafe-flapañ a vez aozet en ul lec'h disheñvel e kêr : un ostaleri, ur c'hafedi, un ti-karter ha kement zo. Ar wech-mañ e vo dalc'het ar c'hafe-flapañ er vediaoueg.

Al levraouegerien a lako an dud d'ober anaoudegezh gant al lec'hioù hag ar servijoù, ha goude-se e vo ur mare evit komz asambles dirak bep a vannac'h te pe kafe... hag un toullad traoù lipous da-heul.

Mont e-barzh frank – digoust.

« Furoshiki el levraoueg » Amprestoù kevrinus er vediaoueg e-pad an hañv



Ha ma vefe amprestet ul levr, un DVD pe ur CD ganeoc'h, hep gwelet ar golo, an titl nag an oberour ? Ha ma rafec'h d'al lennerien all ober anaoudegezh gant ar pezh a zo plijet kalz deoc'h er vediaoueg ?

Gallout a rit amprestañ ha/pe kinnig un amprest koachet en ur furoshiki evit an hañv.

« Ur wech e oa... » : bep eil Merc'her da 3e goude merenn Adalek 4 bloaz - digoust



© Martine Bourne

Merc'her 10 a viz Even

Kontadenn : « Ar pemoc'h pennek bihan » gant Jean-Louis ar C'hraver

Ur gontadenn war astenn savet war un heuliad degouezhioù fentus. Ur redadeg diroll hag ur wrac'h gant ur sapre temz-spered.

Merc'her 24 a viz Even

« Kontadennoù ha luskellerezhioù ez yezh » gant ar Greizenn sokial Ti Menoz

Gallout a rit dont da selaou un istor e div yezh, pe ur ganaouenn en ho yezh vamm.



Mediaoueg Gwengamp
1, Plasenn Maez ar Roue
22205 GWENGAMP Cedex
02 96 44 06 60
mediatheque@ville-guingamp.com
<http://mediatheque.ville-guingamp.fr>